

## **BBTK (buheziñ bugale ha tud kozh) /AEPA (animation, enfance et personnes âgées)**

### **Keleñn micherel / Enseignement professionnel**

kelennet gant Katell Chantreau

Frammet eo ar c'heleñn e-pad an 3 bloavezh Bak micherel BBTK (Buheziñ Bugaleaj Tud Kozh) tro-dro da 3 roll bras :

**Roll 1** : Kemer perzh e mont en-dro ar framm pe ar servij dre lakaat da dalvezout ur raktres buheziñ

**Roll 2** : Buheziñ evit mirout an emrenerezh sokial hag ar yec'hed personel en un ti retret pe en ti

**Roll 3** : Buheziñ gant ur pal diorren, sokializañ ha pleustriñ ar gwirioù sitoian.

Ur meskaj kentelioù teorik, c'hoarioù, poelladennoù pleustrek (raktresoù hiniennel ha stroll), eskemmoù ha prantadoù stummañ en un endro vicherel a roio tu d'ar skolidi da gaout ar skiant-prenet ret evit bezañ buhezourien a-vicher, da sklaeraat o zalvoudegezhioù hag o c'hoantoù ha da gaout ur sell kritik war ar pleustroù buheziñ.

6 sizhunvezh staj o do ar skolidi d'ober, 2 anezho kerzh ar vakañsoù skol (sizhunvezh kentañ vakañsoù an Hollsent ha sizhunvezh kentañ ar vakañsoù goañv). Gouestlet e vo an trimiziad kentañ da gartennaouiñ an tiriad (Karaez) : emgav gant tud hag aozadurioù oberiant war dachenn ar buheziñ, ar c'honteks ensavadurel, anavezout an dud danvez (ha dreist-holl ar vrezhonegerien).

*L'enseignement des 3 années de Bac pro AEPA (Animation Enfance Personnes âgées) est structuré autour de l'apprentissage de 3 grandes fonctions :*

**Fonction 1** : *Contribution au fonctionnement de la structure ou du service par la mise en œuvre d'un projet d'animation*

**Fonction 2** : *Animation visant le maintien de l'autonomie sociale et le bien être personnel en établissement ou à domicile*

**Fonction 3** : *Animation visant l'épanouissement, la socialisation et l'exercice des droits citoyens.*

*Une alternance de cours théoriques, de jeux, d'exercices pratiques (projets individuels et collectifs), de discussions et de périodes de formation en milieu professionnel permettra aux élèves d'acquérir les compétences nécessaires à l'animation, de préciser leurs valeurs et leurs motivations et de porter un regard critique sur les pratiques d'animation.*

*Les élèves devront réaliser 6 semaines de stage en milieu professionnel, dont 2 pendant les vacances scolaires (première semaine de la Toussaint et première semaine des vacances d'hiver).*

*Le premier trimestre sera consacré à une cartographie du territoire (Carhaix) : rencontre d'acteurs de l'animation, univers institutionnel, identification des personnes ressources (et notamment des bretonnants).*

### **Diarbenn Yec'hed Endro / Prévention Santé Environnement**

kelennet gant Katell Chantreau

Boutin eo ar c'heleñn-se d'an holl liseidi enskrivet en ur rann bak micherel.  
3 zem a vez pledet ganto :

A : An hiniennoù kiriek eus o yec'hed

B : An hiniennoù kiriek eus o endro

C : An hiniennoù oberiant war an diarbenn en o metoù micherel.

En eilvet klas e vo studiet : ar reizhiad yec'hed, al luskoù biologel (an hun), an obererezh korf, an dalc'hoù, an hilastaliñ, ar boued ekokiriek, ar riskloù bras, ar c'hudennoù yec'hed ha surentez el labour, ar mennozhioù diazez evit diwall ouzh ar riskloù micherel.

*Cet enseignement est commun à tous les lycéens inscrits dans une section bac pro.  
3 thèmes structurent cet enseignement :*

*A : L'individu responsable de son capital santé*

*B : L'individu responsable de son environnement*

*C : L'individu acteur de prévention dans son milieu professionnel.*

*En classe de Seconde seront étudiés : le système de santé, les rythmes biologiques (le sommeil), les addictions, la contraception, l'alimentation écoresponsable, les risques majeurs, les enjeux de la santé et sécurité au travail, les notions de base en prévention des risques professionnels.*

## **Brezhoneg**

kelennet gant Alan ar Rouz

→ ar pennad kentañ a vo « Dizolo Kreiz Breizh, an dachenn hag an dud » evit kaout un anaoudegezh dre al lennegezh dre gomz (kanaouennoù hengounel), ar filmoù hag a bep seurt danvez ar vro

→ lakaet e vo ar pouez war an eskemm, kreñvaat ar yezh evit mont e darempred ha krouiñ ur rouedad tud en-dro d'al lise ha da ved ar buheziñ (kreizennoù dudi, dilennidi, kevredigezhioù)

→ an dafar pedagogel a zo da vezañ ijinet : klasket e vo lakaat al liseidi da genlabourat gant skipailh RKB da sevel kronikennoù pe atersadennoù

## **Galleg/Français**

kelennet gant Alan ar Rouz

Devenir soi : voies et voix de l'identité

→ travail autour de « Courir » de Jean Echnoz qui sera distribué aux élèves

→ rencontre prévue avec un animateur sportif salarié d'OMS

→ le sport comme moyen de réalisation de soi mais aussi comme symbolique à dimension politique

→ étude de Persépolis de marjane Satrapi (BD et film d'animation)

S'informer, informer : les circuits de l'information

→ initier au regard critique à partir de sources diverses d'information : presse écrite, internet et circuits de l'information

→ projet de visite de Ouest France à Rennes

Dire et se faire entendre : la parole, le théâtre, l'éloquence

- travail autour du théâtre avec une pièce engagée au théâtre de Morlaix (rencontre avec l'équipe)
- mise en voix d'un texte contemporain

## **Ekonomiezh-Merañ / Economie-Gestion**

kelennet gant Antoine Porteneuve

Stummet e vo al liseidi war diazezoù an ekonomiezh, ar gwir hag ar merañ gant ar pal degas dezho gouiziegezhioù war ekonomiezhoù a-vremañ, evito d'em ober diouzh o endro micherel.

Diazezet eo ar program war 4 tem :

- An embregerezhioù hag oc'h endro
- Ar produadur
- Penaos krouet talvoud ouzhpenn ha dasparzh anezhañ
- An daremprediñ e bed al labour

*Le programme d'économie-gestion propose de former l'élève aux fondamentaux de l'économie, de la gestion et du droit. Il s'agit de lui permettre de s'approprier les outils de compréhension du monde économique dans lequel il évolue et de s'adapter à son futur environnement professionnel.*

*Le programme est décliné en quatre modules :*

- *Découvrir l'environnement d'une entreprise.*
- *Les choix d'une entreprise en matière de production.*
- *De la création de valeur à sa répartition.*
- *Les mutations de la relation de travail.*

# DKS EPS

2 eurvezh bep sizhun

Adalek an eilvet klas e vez prientet ar bak, da lavaret eo e klaskomp lakaat anezhe d'ober ar sportoù a vo tremenet e termen klas.

Al liseidi o deus da gaout dilhad a-ratozh evit ober sport ouzhpenn d'an dafar ret evit kemer ur strinkadenn-dour goude.

Evit bezañ dispañset eo ret d'al lisead kaout ur ger skrivet gant ur mezeg nemetken. Ma 'n deus ket an dra-se e ra sport gant ar re all.



**Ar bloavezh-mañ e vo : Step, Embregerezh korf, Neuñvierenzh (saveteiñ), Speg**

*2 heures30 chaque semaine*

*Dès la classe de seconde nous préparons le bac, c'est-à-dire que l'on pratique les sports que nous utiliserons comme support en terminale.*

*Les élèves doivent se munir d'une tenue de sport ainsi que d'affaires pour pouvoir prendre une douche en fin de cours.*

*Concernant les dispenses seule une autorisation médicale sera acceptée, dans le cas contraire l'élève pratiquera avec les autres.*

***Les sports pratiqués cette année sont : Step, Gymnastique, natation (sauvetage), Javelot.***